

An toer

Savet ez on bet e Kerne
E-tal mengleuziou ar mene'.
Yaouankig ez oan darbarer
Ha da bevarzeg vloaz toer.
Biskoaz n'ez on bet laouennoh,
E rankan hel lavared doh,
'Ged pa lakis va zavañcher,
Eur morzol en va gouriz-ler.

Abaoe 'm euz greet meur a doenn,
D'e leiz didoullet o lochenn
Pignet em-eus war vaneriu,
Kempennet d'ezo o zouriu !
Iliz va farroz heh-unan
He-deus bet ezomm euz va foan !
Tal an tiez hag o fignon
Dreist-oll a-raog sul ar pardon,
Hag a-wechou ar goueliou braz,
Am-eus gwenneet gand lêz-raz.

Ha, koulskoude, O ! va breudeur
Va leve n'eo kresket nemeur.
Paour on ganet, paour e choman.
Setu va flanedenn amañ !
Eun devez 'michañs, ma ve red
Din ganeh goulenn va zamm boued,
Ho-po soñj mad euz ho toer
Ho tiwalle diouz gwall-amzer.